

# CANTIC

## AN ITRON VARIA A VULAT

Pehini e deveys un Ilis Gaer e parres Pestivien.

### Var un ton neve.

1. Drindet adorabl, me ho ped  
Da rei sclerigen d'am speret,  
Ma hellin ar fat composi  
Eur c'hantic d'ar Verc'hes Vari.
2. Ho Merc'h e zeo, Tad Eternel,  
Ho pried eo, Speret-Santel,  
Ha c'houi, Jesus, e deus douguet,  
Ha gant eals a-boan cunduet.
3. Evelse ho joa ar vrassa  
Eo ma teuer da publia  
Ar gloar e deus ac ar pouvoar  
Ebars en Env ac an douar.
4. Ebars en Env eo curunet  
Ha dreist pep tra eo elevet ;  
Ar Sænt an Ælez dirazi  
A zeu oll d'en em soumetti.
5. Var an douar bemdez veler  
Miraclou burzudus ha caër  
D'ar re a zeu a vir galon  
Da c'houlen e frotection.
6. Maes bea zeus certen plaçon  
Destinet gant hor guir Autrou  
Evit ar Verc'hes henori,  
Ma cavet sicour diganti.
7. Hep choqui plaç santel ebet,  
Me a souten gant lealdet,  
Penos emedi n'hor c'hontre  
Ar principala aneze.
8. Me goms deus an templ biniguet  
E parres Pestivien savet  
En oc'h henor, Guerc'hes Vari ;  
Eur guir refug da pep hini.
9. Ho ty zo, Guerc'hez a Vulat,  
Leun a c'hraçou evit pep stad :  
Ennan ne ve den refuset  
P'ho ped gant our fianz parfet.
10. Pliget ganeoc'h, Itron Varia  
Dont da ziski da peb hini  
Penos a caver eur vam vad  
En hoc'h Ilis caër a Vulat !
11. D'ar re, sionas ! en em gaff dalf  
E zeo eur refug ordinal  
Meur a den beuzet pe lazet  
E deveys bet reascitet
12. Mar oc'h eus-hu eur goal broceoz,  
Quemeret-y d'Advocades  
Ac, e zoc'h sur e c'honofet :  
Calz en deuz an bet approuvet.
13. Mar d'oc'h en danger var an dour  
Guelvet ar Verc'hez d'ho sicour :  
Eun nombr bras e deus bet salvet  
Pa credent oll e voant beuzet.
14. Ar re foll ac ar re troublet  
Ac a squient ac a speret,  
A zeu da receo ar furnez  
Dre intercession ar Verc'hes.

15. Ar re glanv, ar re languissant,  
Ar re a guertz en accidant  
En Bulat e cafont remed  
Souveren evit ho c'hlenvet.
16. An tan goal a zeu da vouga  
Pa zer aman de supplia;  
Recour a rer an treou gollet,  
Pa vent dezi recommandet.
17. Bea so tud, p'arru gante  
Eur malheur, pe gant ho ligae,  
Pe eur c'holl bras hep song ebet,  
A zo evel disesperet.
18. Ret eo dont d'ho recommandi  
En Bulat d'ar Verc'hez Vari;  
Eno e vezont consolet,  
A soulaget oll a speret.
19. Ar groaguez a ve fors poaniet  
O c'henel ho innoçantet  
Azo oll dilivret timat,  
Pa vezont goestet en Bulat.
20. Ar bec'herien ar re vrasa  
A zeu d'en em gounvertissa,  
A da silesel ho goal stad,  
P'ho recommander da Vulat.
21. Me rei affirmationnou  
Dre un nomb bras a viraclou  
Deus ar pez a meus avancet,  
Bezit attantif d'am c'hlevet.
22. Eun den dall demeus a Guerien  
A recevas ar sclerijen,  
Da Vulat e voa cundret,  
Hep conductor eo distroet.
23. Baillif Caraëz pareillamant  
Rentet dall dre eun accidant,  
Ne gavas get a remejou  
Quen a voa en ho feuteuniou.
24. Dre ar vertu deus an dour-ze  
Ac ho sicour, guir Vam Doue  
Ar sclerijen a recevas  
Ar vech quenta m'ho piskas.
25. Tost da Voengamp, ne neusquet pel,  
E coezas er stang eur buguel,  
E vam pa er c'havas beuzet,  
A voa evel desesperet.
26. Eun den a llis a zeuas  
En Bulat en recommandas;  
Ar buguel voa ressucitet,  
Ac ar vam a voa consolet.
27. Deus a Locarnan eur buguel,  
Gant pignon an ty o coezel,  
Avoa subitamant lazet  
Ac e oll izilli torret.
28. Didan ar mein cavet maro,  
E teuas e vam d'en goesto  
D'ar plaç caër-ma gant eur fe vras  
Dirac calz e ressuçitas.
29. A zouar Caraëz eur paysant.  
Voa chieanet injustamant;  
Prest avoa da goll e broceç  
P'ho quemeras d'Advocadez.
30. Quenquent a ma pedas Mari.  
Da zifen e gaus gant sourci,  
E recevas eur jujamant  
Favorabl bras a consolant.
31. Neuse e teuas da Vulat  
A bresant e roas e zillat,  
Ac ouspen var e zaoulin noas  
En dro d'am llis e quertzas.
32. Eun noter dimeus ar c'hontre  
D'eur goas à Vaël a refuse  
Eur guitañç rapportet ganta,  
A consequañç vras d'an den-ma.
33. Rac en faut e represanti,  
E c'her justic d'e gondaoni:  
Da Vulat en em adressas,  
An tronos er guer en c'havas.
34. A Gallac Dom Louis ar Ber,  
O vont da Rom voa an danger  
Da veza er mor bras benzet,  
Ous ho pedi voa preservet.

35. Ho lestr gant orag ha tempest  
Da anfonci ar mor voa prest,  
E zent d'en em strinca an dour  
Pa deujoc'h, Guerc'hes, d'ho sicour.
36. An avel a stminuas  
Al lestr var ar bar a savas;  
Evel m'en em recommandjont,  
Ho protection a gueb-jont.
37. Deus a vourg Bulat e voa couet  
Eur vreg en eur punç don meurbet;  
Teir heur e voa cuzet en dour,  
Pa bedjont Mari d'e sicour.
38. Incontinent avoa guelel,  
Ac ar memes anser tennet  
Yac'h a dispos, leun a vue :  
Meulomp Rouanes an Ael!
39. A Pestivien Fantic Lucas  
Follet ac insanset, sionas!  
Mæs quen terrubl quen a rede  
Ar paressiou deus ar c'hontre.
40. Prest da veuzi en eur stang vras  
Ar Verc'hes er mès e zennas;  
Eun Itron, 'mesi, var an dour,  
A velas ho tont d'e sicour.
41. He c'herent evel m'è c'haf-jont  
Da Vulat ganti e teujont;  
Eno evoa antieramant  
Rentet parfet a jugeamant.
42. An Autrou Lestaurec ive  
Pemp mis voa clanv var e vele,  
Poaniet deus è oll izilli,  
A so bet goestet en e dy.
43. Ac ebars ar memes instant,  
En deus cavet soulajamant  
A yec'het deus e glenvejou,  
A liberte deus e vemprou.
44. Eun Itron deus a Goat-Huel  
Privet a sicour naturel,  
O Languissa gant clenvejou,  
G'houi eo, Itron à Gosquerou.
45. Evit bet ama sicouret,  
Eun dolen a deus digasset  
Pini 'deu d'e represanti  
O c'houll sicour digant Mari.
46. Ebars an parres Plougonver  
E crogas an tan en eur gaer,  
Losquet vije antieramant  
Penevedoc'h, Guerc'hes puissant.
47. Evel ma voa dispartiet  
Offranç d'ho Ilis biniguet,  
E varvas an tan ac ar flam;  
Jesus, ra vo meulet ho Mam.
48. En Pempoul-Goelo avoa bet  
Croguet an tan en eur bern hed;  
N'ellent dont aben d'en laza,  
Quen a deuzoc'h d'ho assista.
49. O miracl dign bout remerquet!  
Ar plouz a zo bet oll losquet,  
Hep offansi ar greun toc'hat,  
Dre ho c'raç, Itron a Vulat.
50. Eun ygen a ye gant al faer:  
Chilaouet c'hoas eur miracl caer;  
O veza goestet da Vari,  
Ne allas qet e dransporti.
51. Ebars en eur roc'h en hent bras  
An ygen e rout a verquas,  
A chom evel staguet outhy :  
O puissant deus a Vari!
52. A Zuault eur vreg honorabl  
Dre un domag considerabl  
Avoa evel desperet,  
Troublet memes deus a speret.
53. Dont a rès tud ganti expres  
D'e digas da dy ar Verc'hes,  
Quen return a voa consolet,  
A dre ho c'raç rentet parfet.
54. Marie Thepant deus a Vulat  
En poan guenel voa an eur stad  
Mervel arre hep douet ebet,  
Guerc'hes, c'hui neus-y dehvret.

55. Mæs na voa qet meconnessant,  
Rei a ras eur soleil ardent  
D'ar Verc'hes santel a Vulat.  
Evit dont d'e zrugarecât.
56. Eur vreg anevoa eur buguel  
Incorrigibl, un den cruel  
Dont a ras douç, a humor vad,  
Pa voa bet goestet en Bulat.
57. An Ancien a Plougonver,  
Hervez m'en deur scifet d'ar guær  
En Bas-Flandrez en eur gombat  
En deus bet sicour a Vulat.
58. Daou compaignon avoant hepquen  
Ous ho pedi bars en dachen  
Ac ezint bet ho daou salvet,  
P'o devoa d'ac'h en em voestet.
59. Eur feunteun a zo ar Vered  
Admirabl bras eo e effet,  
Ous e scarza e teu al læz  
Abondant da bep magueréz.
60. N'en deus ama miract ebet  
Na gaffen c'hoas en assuret,  
Anter-cant evel pepini,  
Re hir e vent da rapporti.
61. Mar plich ganeoc'h eprouvet  
Pa en em goelfet affliget,  
Ebars Bulat puissanç Mari  
Biscoas ne vanqas da hini.
62. Eurur oc'h, Pestiviens,  
Da gavet eur gaër a llis  
En bourg Bulat, vit hinori  
An Hini ne vanq da hini!
63. Epad ar bloas, deis ar goueliou  
Pardon so ac indulgeançou,  
O coves ha communia,  
Ac o tonet d'e bisita.
64. Mæs varlerc'h an Nativite  
Ar sul quenta a so ive  
Ar c'haëran pardon anezo  
Pelec'h a teu tud a pep bro.
65. Cresqui ra ar pelerinet  
Graçou Mari ne vianont qet;  
Oll e obtenont ho mennat  
En ty ar Verc'hes a Vulat.
66. Guerc'hes santel, nin ho suppli,  
Da guement den a deui d'ho ty  
Roit ar c'hraç d'ho eneou  
Da bossedi oll ar joaïou.

E ty Ar Goffic, e Lanauon.

